

Sinema e brezhoneg



Bilañs ar 14vet troiad filmoù-bevaat e brezhoneg e Breizh

Miz Genver- Miz Even 2016

Daoulagad Breizh

13 rue Michel Le Nobletz BP 206

29172 DOUARNENEZ Cedex

02 98 92 97 23

daoulagad.bzh@orange.fr

www.daoulagad-breizh.org

Ar Filmoù

Adalek 2 vloaz

Ar valeadenn war valaenn

Ur programm 3 film-bevaat (50 mun)

Lestromp diouzhtu evit ur programm strobiniellus !

Tri film-bev-buhezek, barzhedek ... ha hud ! Evit brasañ plijadur an danvez sorserien !



Un tammig bihan

sevenet gant Alicja Jaworski
(Sveden)



Un devezh fiskal kaban

sevenet gant Nils Skapan
(Lettonia)



Ar valeadenn war valaenn

sevenet gant Max Lang ha Jan Lachauer
(Rouantelezh-Unanet)

Alies o deus c'hoarzhet ar skolidi gant ar film berr kentañ. Kavet o deus Ar Valeadenn war valaenn plijus tre. A-wechoù e oa bet lennet al levr e brezhoneg en a-raok er c'hlas, pe goude an abadenn. Dedennus-tre eo labourat war al levr ha war ar film war un dro.

Adalek 6 bloaz

Kan ar mor

Ur film sevenet gant Tomm Moore

Film-bevaat / 1e33 / Iwerzhon-Danmark-Belgia-Luksembourg-Frañs / 2014



Emañ Glen ha Morgana o chom gant o zad e lein un tourtan war un enezenn vihan. Evit bout gwarezet diouzh dañjerioù ar mor e vezont kaset gant o mamm-gozh e kêr. Ben a zizoloio neuze ez eo e c'hoar vihan ur Selkie anezhi, ur boudig mor a zo gouest adrugarez d'he c'han da zistrobinellañ ar voudiged hud bet sordet gant ar Sorserez he zouded. Dav vo da Glen ha Morgana talañ ouzh an arvar hag ouzh o anken a-hed o beaj estlammus. Rankout a raint stourm ouzh ar sorserez ha sikour ar voudiged hud evit ma adkavint o galloudoù.

Eil film-bevaat hir Tomm Moore, ur severer eus Iwerzhon. Advouezhiet e oa bet e film kentañ Brendan ha sekred Kells, ha kinniget hon oa anezhañ d'ar skolidi e 2010. Berzh-bras en deus graet ar film awenet gant mojennoù keltiek e-mesk ar skolidi hag ar skolaerien. Ur bern DVDoù a oa bet gourc'hemennet diganeomp.

Pedet e oa bet Tomm Moore evit digoradur an diskouezhadeg «War pazioù Brendan» e abati Landeveneg. Profitet hon eus evit kinnig dezhañ un emgav gant skolidi divyezhek Douarnenez ha Kraon. An daou film a oa bet gwelet gant ar skolidi en a-raok. E saozneg hag e brezhoneg e oa bet lusket an eskemmoù. Ur bern goulennoù o deus savet ar skolidi. Treset en deus Tomm Moore tudennoù e filmoù dirazo. Lod eus ar skolidi o deus kanet ur ganaouenn eus Kan ar mor, e gouezeleg. Fromus tre eo bet an emgavioù-se evit an holl. Tomm eo Tomm Moore ouzh ar gouezeleg ha kizidig ivez ouzh ar brezhoneg, splann eo !

L'organisation

Gant Daoulagad Breizh ha Dizale, a-gevret, e vez graet dibab ar filmoù da advouezhiañ ha da skignañ. Abaoe miz Gwengolo 2005, pa oa bet sinet ar c'hendivizad nevez gant Dizale, e ra Daoulagad Breizh war-dro skignañ ar filmoù ha kenurzhiañ an abadennoù. Dibaoe dek vloaz e vez graet ha skignet an dafar kehentiñ (ar skritelloù, ar fichenoù war ar filmoù hag an doser evit ar skolaerien) gant Daoulagad Breizh. Gant Dizale e vez roet an eilennoù (DCP ha DVD). Faturennet e vez ur priz ingal da bep bugel : 2,50 euro.

Hervez al lec'h e vez aozet an abadennoù gant kevredigezhioù lec'hel pe gant Daoulagad Breizh war-eeun. War ziorren ez a ar rouedad skignañ abaoe deroù an droidad. Strivañ a ra Daoulagad Breizh hag he c'henlabourerien evit kavout lec'hioù nevez ha plijus evit kinnig d'ar vugale un abadenn a galite.

Hor c'henlabourerien :

E Aodoù-an-Arvor : Ti ar Vro Sant-Brieg, Ti ar Vro Treger Goueloù

E Penn-ar-Bed : Brezhoneg e Plouzane, KLT, Ti ar vro Leon, Ti ar vro Kemper, Ti ar vro Kemperle, Ti ar vro Landerne-Daoulaz, Sked, Ti-kêr Karaez, Strollad Plougin

E Il-ha-Gwilen : Skeudenn Bro Roazhon

El Liger-Atlantel : Ajañs sevenadurel Breizhek Liger-Atlantel Morvan Lebesque

Er Mor-bihan : Divyezh Sant-Teve, Emglev Bro an Oriant, Kreizenn sevenadurel Hermine e Sarzav, Ti douar Alre, Bod Kelenn (Bro ar Roue Morvan)

Ambrouget e vez pep abadenn, gant un den ezel deus ar gevredigezh lec'hel, Daoulagad Breizh pe Dizale. Degemeret e vez ar skolidi ha kinniget e vez ar filmoù e brezhoneg atav.

Gant ma vez deus ur sinema war al lec'h e klaskomp aozañ an abadenn di. E-mod all e vez feurmet kreizennoù sevenadurel pe salioù plijus, dafar skignañ enne (luc'hvanner video). Pa n'eus ket deus an dafar e feurmomp anezhañ. Klask a reomp kement ha ma c'heller aozañ an abadennoù sinema er-maez deus ar skol. E lec'hioù zo avat n'eus ket tu ober mod all eget aozañ an abadenn e-diabarzh ar skol.



Bilmañs hollek gant sifroù

An arvesterien :

11 508 mont e-barzh e pep lec'h e Breizh
(534 ouzhpenn e-keñver 2015)

11 501 skoliad (+573)

7 arvester all (-39)

1 den o heuliañ kentelioù noz (War-sav)

6 studier (Kelenn)

6 033 mont e-barzh evit Ar valeadenn war valaenn (+ 569)

5 475 mont e-barzh evit Kan ar mor (-35)

81 lec'h skignañ

(2 nebeutoc'h e-keñver 2015)

33 sinema gant dafar video niverel,
26 sal gant dafar,
7 sal hep dafar,
3 skol gant dafar,
12 skol hep dafar

166 abadenn-skol

(+7 e-keñver 2015)

88 gant Ar valeadenn war valaenn
78 gant Kan ar mor

195 skol-vamm ha kentañ-derez

(-1 e-keñver 2015),

1 skolaj

(+1 e-keñver 2015),
skolioù publik divyezhek
skolioù katolik divyezhek
skolioù Diwan

Kresket eo an niver a dud o vont e-barzh er bloaz-mañ c'hoazh, o tremen deus **10 974 e 2015** da **11 508** bloaz war-lerc'h.



Digresket eo nebeudik an niver a lec'hioù hag a skolioù (-2 et -1). Ur skolaj en doa kemeret perzh er bloaz-mañ. Hini ebet warlene.

Dre ma oa bet serret skol Diwan Pariz n'hon oa aozet abadenn ebet eno.

O welet an niver uhel a vugale e lec'hioù-zo oamp bet rediet da aozañ div skignadenn pe ouzhpenn gant ar memes film, evit ma vefe aesoc'h degemer ar vugale ha plijusoc'h an abadennoù. Feurm ar sal a goust keroc'h deomp neuze hag alies ne vez ket trawalc'h a mont e-barzh evit kempouezhañ kresk ar faturenn.

Bilañs hollek - emdroadur


	2005	2006	2007	2008	2009	2010	2011	2012	2013	2014	2015	2016
Arvesterien	3097	5257	6505	6520	7736	8228	8705	9272	10304	10203	10974	11508
Skolioù	65	97	121	120	149	151	154	160	176	179	196	196
Abadennoù ?		49	91	101	127	135	138	140	147	148	159	166
Lec'hioù skignañ	28	34	45	49	61	67	69	70	77	76	83	81



Bilañs an droiad dre zepartamant

An holl arvesterien	1536	5348	971	519	3134	0	11508
Arvesterien all e touez an niver hollek	0	7	0	0	0	0	7
Arvesterien ouzhpenn e-keñver 2015	-98	486	18	34	122	-28	534
Skolioù en holl	27	85	17	7	60	0	196
1 skolaj e touez ar skolioù (skolaj ebet e 2015)	0	1	0	0	0	0	1
Skolioù ouzhpenn e-keñver 2015	-3	0	2	-1	3	-1	0
Lec'hioù skignañ	19	31	8	3	20	0	81
Lec'hioù skignañ ouzhpenn e-keñver 2015	1	1	2	1	-5	-2	-2
Abadennoù	36	70	14	6	40	0	166
Abadennoù ouzhpenn e-keñver 2015	2	8	3	2	-6	-2	7

An niver a mont e-barzh dre zepartamant
Troiad filmoù-bevaat e brezhoneg 2016



An droiad dre departamant ha dre c'her gant sifroù

Dep	Kêr	Aozer	Lec'h skignañ	Abadennoù	Skolioù	Mont e-barzh
22	Bear	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	99
22	Boulvriag	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	1	2	45
22	Dinan	Daoulagad Breizh	Sal Robert Schuman	2	1	103
22	Gwengamp	Ti ar vro Treger Goueloù	UCO	2	2	112
22	Kalag	Daoulagad Breizh	Sinema Argoat	1	1	15
22	Kawan	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	94
22	Landreger	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	25
22	Lannuon	Ti ar vro Treger Goueloù	Lise Felix An Dantec	2	2	255
22	Louaneg	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	33
22	Louergad	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	62
22	Pabu	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	87
22	Pempoull	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	35
22	Perwenan	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	52
22	Plistin	Ti ar vro Treger Goueloù	Sinema Le Douron	2	1	55
22	Plonevez Moedeg	Ti ar vro Treger Goueloù	Sal ar gouelioù	2	2	77
22	Ploueg ar Mor	Ti ar vro Treger Goueloù	Sal	2	1	43
22	Rostrenen	Daoulagad Breizh	Sine Breizh	2	4	169
22	St-Brieg	Ti ar vro Sant- Brieg	Sinema Club 6	2	2	136
22	Tregastell	Ti ar vro Treger Goueloù	Skol	2	1	39
29	Ar Gelveneg	Daoulagad Breizh	Le Malamok	2	1	103
29	Brest	Sked	Sinema Les Studios	7	10	674
29	Brieg	Ti ar Vro Kemper	Sal Arthémuse	2	1	123
29	Douarnenez	Daoulagad Breizh	Sinema Le Club	2	2	183

Dep	Kêr	Aozer	Lec'h skignañ	Abadennoù	Skolioù	Mont e-barzh
29	Gwitalmeze	Strollad Plouguin	Sal Arcadie	2	2	123
29	Karaez	Ti-kêr + Daoulagad Breizh	Sinema Le Grand Bleu	2	5	256
29	Kastell-Paol	KLT	Sinema Le Majestic	2	2	112
29	Kastellin	Daoulagad Breizh	Sinema Agora	2	2	63
29	Kemper	Ti ar Vro Kemper	Cinéville	2	8	487
29	Kemperle	Ti ar vro Bro Kemperle	Sinema La Bobine	4	9	462
29	Konkerne	Daoulagad Breizh	Cinéville	2	3	125
29	Kraon	Daoulagad Breizh	Sinema Rex	2	1	43
29	Landerne	Ti ar Vro Leon	Sinema Le Rohan	2	4	286
29	Landivizio	Daoulagad Breizh	Skolaj St-Joseb	1	3	100
29	Landivizio	KLT	Skol	1	1	13
29	Laniliz	Ti ar Vro Leon + Daoulagad Breizh	Sal Yves Nicolas	2	2	222
29	Lanveur	KLT	Skol	2	1	75
29	Lesneven	Ti ar Vro Leon	Sinema Even	2	3	234
29	Lokournan	Sked	Sinema Le Bretagne	2	5	321
29	Montroulez	Daoulagad Breizh + KLT	Sinema La Salamandre	4	4	222
29	Plabeneg	Ti ar Vro Leon	Sal Tangi Malmanche	2	2	112
29	Plouarzhel	Daoulagad Breizh	Mediaoueg	2	1	85
29	Ploueskad	KLT + Daoulagad Breizh	Sinema Le Dauphin	2	1	58
29	Plougastell	Sked	Sinema L'Image	4	4	446
29	Plouguerne	Daoulagad Breizh	Mediaoueg	2	1	89

Dep	Kêr	Aozer	Lec'h skignañ	Abadennoù	Skolioù	Mont e-barzh
29	Plouzane	Daoulagad Breizh	Kreizenn sevenadurel	2	1	88
29	Plozeved	Daoulagad Breizh	Sal Avel Dro	2	1	57
29	Pont'n Abad	Daoulagad Breizh	Skol Sant-Gabriel	2	2	110
29	Pontekroaz	Daoulagad Breizh	Kreizenn sevenadurel	1	1	13
29	Sant-Riwall	KLT	Sal ar gouelioù	2	1	27
29	Tregon	Daoulagad Breizh	MJC Le Sterenn	2	1	36
35	Felger	Daoulagad Breizh	Mediaoueg	1	1	33
35	Gwitreg	Daoulagad Breizh	Sinema Aurore	2	1	80
35	Kastell-Bourk	Daoulagad Breizh	Sinema Etoile	1	1	36
35	Maoron	Daoulagad Breizh	Sal ti-kêr	2	1	26
35	Ploermel	Daoulagad Breizh	Sal La Loupiote	2	1	26
35	Redon	Daoulagad Breizh	Sinema Manivel	2	3	134
35	Roazhon	Skeudenn	Maezioù Frank	2	8	616
35	Sant-Maloù	Daoulagad Breizh	Kreizenn Allende	2	1	20
44	Gwenrann	Daoulagad Breizh	Sinema Presqu'île	2	1	27
44	Naoned	ACBM	Sinema Katorza	2	5	463
44	Sant-Nazer	Daoulagad Breizh	Ti ar re gozh	2	1	29
56	An Alre	Ti Douar Alre	Sinema Ti Hanok	2	9	448
56	An Henbont	Emglev Bro an Orient	Kreizenn Jean Ferré	2	2	177
56	An Orient	Emglev Bro an Orient	Cinéville	2	3	239
56	Ar Faoued	Bod Kelenn + Daoulagad Breizh	Sinema Ellé	2	1	23
56	Baod	Daoulagad Breizh	Sinema Le Celtic	2	3	113

Dep	Kêr	Aozer	Lec'h skignañ	Abadennoù	Skolioù	Mont e-barzh
56	Gourin	Bod Keleñn + Daoulagad Breizh	Sinema Jeanne d'Arc	2	4	100
56	Gwened	Daoulagad Breizh	Cinéville	4	10	638
56	Gwidel	Emglev Bro an Oriant	Sal Estran	2	3	137
56	Josilin	Daoulagad Breizh	Sinema Beaumanoir	2	2	105
56	Kaodan	Emglev Bro an Oriant	skol Saint-Joseph	1	1	47
56	Karnag	Ti Douar Alre	Kreizenn sevenadurel Terraqué	2	3	147
56	Kistreberzh	Daoulagad Breizh	Sinema Iris	2	2	73
56	Lanarstêr	Emglev Bro an Oriant	Sal Tam-tam Mediaoueg	2	2	117
56	Langedig	Emglev Bro an Oriant	Sal EMA	2	2	125
56	Logunec'h	Daoulagad Breizh	Sinema Le Club	2	4	223
56	Pondi	Daoulagad Breizh	Sinema Rex	2	3	90
56	Pont-Skorf	Emglev Bro an Oriant	Strapontin	1	1	29
56	Rianteg	Emglev Bro an Oriant	Sal Paul Emile Victor	2	1	46
56	Sant-teve	Divyezh + Daoulagad Breizh	Le Dôme	2	2	164
56	Sarzhav	Centre culturel L'Hermine + Daoulagad Breizh	Kreizenn sevenadurel L'Hermine	2	2	93
			81 lec'h	166	196	11508

An eil troiad

Tri bloaz zo bremañ omp kroget gant ur c'hinnig nevez : un eil abadenn sinema evit ar skolioù de-dennet da vont un eil gwech da sellet ouzh ur film-bevaat e brezhoneg. Ar filmoù kinniget a zo reoù bet advouezhiet pell zo, ha n'o deus ket profitet c'hoazh d'ar vugale skoliataet hiziv an deiz. Memes doare hag an droiad pennañ e reomp o c'hinnig daou brogramm. **Laban an tasmant bihan** evit ar re vihan, **Kie ar bikez vihan** evit ar re vras. Filmoù troiad 2008-2009 e oant bet c'hoazh.



Laban an tasmant bihan
Film-bevaat / Sveden / 2006 / 44 mn
www.lesfilmsdupreau.com
Sevener : Lasse Persson
Advouezhiañ : Dizale



Kie ar bikez vihan
Film-bevaat / Japan / 2005 / 1e45
www.butta-connection.net
Sevener : Isao Takahata
Advouezhiañ : Dizale

Ne c'hell ket an emglevioù bro gouestlañ amzer ouzhpenn da gas an eil troiad-mañ da benn. P'hon oa kinniget an eil troiad evit ar wech kentañ e 2014, hon oa profitet deus ar fed e oa un den war e servij keodedel gant Daoulagad Breizh evit arnodiañ ar raktres-se gant ar skolioù a labouromp gante war-eeun. Dibaoe e respontomp d'ar skolioù c'hoant gante mont un eil gwech d'an abadennoù sinema, traken. Ne c'hellomp ket kas amzer ouzhpenn da gendrec'hiñ skolioù all. Ul labour leun amzer a vefe dav kaout evit heuliañ ha donaat ar c'hinnig-mañ.

An arvesterien :
473 mont e-barzh (-177)

274 evit Laban an tasmant bihan
199 evit Kie ar bikez vihan

10 skol-vamm ha kentañ-derez (-8)

16 abadenn-skol (-6)
9 eus Laban an tasmant bihan(-2)
7 eus Kie ar bikez vihan (-4)